

**CONFERANÇOU**

**CURIUS,**

**UTIL HAC INTERESSANT,**

**EVIT**

**AMUSAMANT AN DUD DIVAR AR MEAZ.**



---

**E. Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.**



# CONFÉRANÇOÙ

CURIUS,

UTIL HAC INTERESSANT.

G. *GANT piou e zeo bet poblet ar bed?*

R. Gant bugale Noë : Sem , Cham ha Japhet.

G. *Pez seurt partach a voe grêt dezo?*

R. Sem en devoe al lodennou eus ar c'hreiz-de eus an Asi ; Cham en devoe an Affriq , ha Japhet an Europ hac al lodennou nord en Asi.

G. *Pet sqiant natur en deus an den?*

R. Pemp : Ar Güelet , ar C'hlêvet , ar Blassa , ar C'huessa , hac an Touch.

G. *Piou en deus invantet ar Scritur?*

R. En attribui a rear da Zoue memes , a roas da Voyses an dec Gourc'hemen eus al Lezen , scrifet var diou daul ven. Cadmus , roue Thèbes , mab da Agenor , roue Phenici , a zigassas ar Scritur eus a Phenici en Greç , vardro ar bloaves 1617 aroc J.-C.

G. *A bez seurt utilite eo ar Scritur?*

R. N'en deus den na gonven e zeo an utilita eus an oll sqiantchou : beza e zeo ené ar o'hommerç , tablen an

amzer dremenet, reglen an hini da zont, ha messenger ar sonjesonou. Anfin, ar Scritur a zo un dra necesser d'ar sqianchou oll, pa zeo guir anes-an ne alfet get agissa e stat abet eus ar vuez, dreist oll en ur vro e pehini na vever nemet dre ar c'hommeç.

*G. Petra eo an Eol?*

*R.* Ur globin caer meurbet, a so o sclêrijenna an douar, hac an oll gorfou all ténval eus ar pezh a gomos ar bed.

*G. Petra en deus a deoder?*

*R.* Beza en deus var dro tri c'hant nontec mil leo, tost da gant unnek goech brassoc'h eguet hini an douar; dre beta e veler e zeo brassoc'h an eol vardro ur milion pevar c'hant mil goech eguet an douar. Beza e ma pevar milion leo ha trêgont diouzomp.

*G. Da betra e servich an Eol?*

*R.* Da sclêrijenna ha da domma an douar, da brodui ar plant, an anevalet, ha da oher dezo beva ha cresqi. An Eol a sclêrijenna ar bed abaoue ma zeo crouet, ha placet eo gant Doue ivez get just evel ma zeo dleet, evit beza util deomp : rac ma vez huelloc'h, ne alfe get astomma an douar; ma vez izelloc'h, e teufe da c'brilla gement so oll. Servicha ra c'hoas da regli buez an dud, dre an heurion, an devezion, ar misiou, ar bloavesion hac ar c'hantveion : anfin, hep an Eol n'efe den beva.

*G. Livirit dia hac an Eol a flach?*

*R.* Goechall e credet e troe an eol endro d'an douar;

mes bremâ e zear sur e zeo an douar a ra an dro d'an eol.

*G. Pegueit e mâ al Loar diouzomp?*

*R.* Pemp mil ha pèvar ugent tri c'hant peder léo varnuguent peurvuia, rac avichou e vez tostoc'h, hac avichou pelloc'h : vardro pemp goech varnuguent e zeo biannoc'h eguet an douar.

*G. Pegueit emedi ar Stered eus an douar?*

*R.* N'eus qet gallet er stadndi en ur fêçon sclêr; mes gouzont a rear penos ar re so an tosta, a so, d'an nebeuta tout, pèvar c'hant mil goech pelloc'h eguet an eol.

*G. Petra eo un Eclip Eol?*

*R.* Un Eclip Eol en deus lec'h pa en em gav al Loar etre an Eol hac an Douar.

*G. Hac un Eclip Loar?*

*R.* Un Eclip Loar a êru, p'en em gav an Douar etre al Loar hac an Eol.

*G. Penos en em form ar Glao?*

*R.* Dre stancadarez ar c'hounabrennou, a so forret gant an avel, pe an digoridiguez eus an ear, a forç d'en em unani en bannac'hou, perè en em gueb neuze dent da veza re bouner evit en em souten en ear, hac a goez en Glao.

*G. Petra eo an Erc'h?*

*R.* Un assablach eus a damouigou-scorn, meturbet bian, formet dre calediguez ar c'hounabrennou. An tamouigou scorn-se, ous en em unani en nombr bras, hac en eur lezel entrezo calz a spac gollô, ne formont

nemet pluennouigou scanv a Erc'h, pere a receo eus a bep costez ar sclêrijen, hac a barris guen-cann.

*G. Penos en em form ar Grizill?*

*R.* En em formi a ra eus tacadennou glao, pere, en ur dremen ebars en ouabrou yen, en em scorn en eur goeza. Evelse ne dlefe james beza brâssoc'h eguet an dacadennou glao; mes mar deo yen aoualc'h evit scorna ar bannac'houigou dour a rancontr, pe m'en em unan meur a c'hreunen assambles, e teu da veza tevoc'h, hac e form ar greuniou-se, pere a so avichou bras evel ur graouen pe ur vy; ar pezh so caus peurvuia e ra muioc'h a zrouc ar Grizill eguet ar glao, eus a'behini ar bannac'hou, elec'h en em unani en eur goeza, so, er c'hontrol, diyiset dre ar resistanç eus an ear.

*G. Petra eo ar Gurun?*

*R.* Ar Gurun a so ur vogueden, pehini o veza ranfermet en ur gouabren, a sco gant nerz ar gouabren-se; al luheden a barris aroc ar gurun, a deu deus ar stocaden, pehini a anflam ar vogueden-se. Ar foultr, pehini eo ar vogueden-se anflamet, o tont anfin da grevi ha da zifframma ar gouabren, dre an oll effortchou a ra, a fraill hac a zistruch-oll qement a rancontr.

*G. E pet qevren e tiviser ar bed?*

*R.* E peder : an Europ, an Asi, an Affriq, hac an Ameriq.

*G. Gant piou e zeo bet disoloet an Ameriq?*

*R.* Gant Christoph Colomb, naviguer brudet bras eus

a Gêñ, er bloa 1492.

*G. Pehini eo ar vrassa eus ar beder guevren-se eus ar bed, hac e pehini en em gav ar muia a aour hac a arc'hant?*

*R. An Ameriq.*

*G. Pehini eo ar binvidiga.e froeziou an douar?*

*R. An Asi : hi eo a fournis ar spiceres, ar mein hac ar plant precius, ha calz a draou all.*

*G. E pehini eus anezo e santer ar brassa tomder?*

*R. En Affriq, brô ar vaurianed.*

*G. Pehini eo ar muia poblet, hac e zeo ar sqianchou ar muia soignet?*

*R. An Europ, ar bianna eus anezo, mes ar gaera hac an interessanta. Enni en em gav ar greizen eus an dereadeguez, ar bividiguez, al lezennou, ar sqianchou hac ar c'houmerç.*

*G. Penos e c'hanver ar pévar gostez eus ar bed?*

*R. Ar C'hreiz-dez, an Nord, ar Sav.-Eol, hac ar C'hus-Eol.*

*G. Penos gouzout al lec'h m'en em gever?*

*R. Ne zeus nemet trei ar c'hein d'ar sav-eol; neuze e zeus a gleiz ar c'hreiz-dez, a deo an nord, adrec ar sav-eol, ha dirac ar c'hus-eol.*

*G. Penos e hanver an Avelou a c'hoez eur ar pévar gostez-se?*

*R. O henvel a rêt er memes reng : Avel Su, Avel Nord, Avel Reter, hac Avel Gornaucq.*

*G. Petra eo ar Môr ?*

*R. Ur vrasder divusul, goloet a zour c'hoëro ha sall.*

*G. Perac eo sall ha c'hoëro an dour môr ?*

*R. Dre gombinêson meur a vatier, eus a bere e zeo an haulen al loden principal, hac a deu a fong ar môr memes, gant re-all digasset gant ar rivierou vras en em dol ebars, hac ives c'hoas ar re a zorti eus a exalêson an douar.*

*G. Penos e tiviser an amzer ?*

*R. Dre ganvet, dre vloas ha dre vis.*

*G. Pet devez en deus peb Mis ?*

*R. Guenveur en deus 31 ; C'huevret, 28 pe 29, herves ma vez ar bloaves ; Meurs, 31 ; Ebrel, 30 ; Mae, 31 ; Even, 30 ; Gouere, 31 ; Eost, 31 ; Guengolo, 30 ; Here, 31 ; Du, 30 ; ha Qerzu, 31.*

*G. Petra a hanver bloaves ordinal, pe biseost ?*

*R. Ar bloaves ordinal e deus 365 devez, hac ar bloaves biseost 366 : êruout a ra bep pevar bloas.*

*G. En-ped loden e tiviser ar Bloa ?*

*R. En peder : an Nêvez-Amzer, an Hân, an Discar-Amzer, hac ar Gouân.*

*G. P'eur e commançont-ii ?*

*R. Ar guenta a gommanç an 21 pe an 22 a veurs ; an eilvet, an 20 pe an 21 a even ; an drivet, an 20 pe an 21 a Voengolo, hac ar bedervet, an 20 pe an 21 a Guerzu : tri mis en deus pep sêson.*

*G. Petra e ell ar Bed da gaout a vrasder ?*

*R. Ar Bed en deus nao mfi lêo dro ; ha ma vez allet*



toull a an douar, dindah hon treid, e vez ret ober un toull a bevar mil pemp cant leo; neuze e vez c'vret en tu-all tud hac e deus o zreid ous hon re-ni, rac an douar o veza rond, en em gav habitet a bep costez.

*G. Comzit din bremã eus a un invantion benac.*

*R.* An Tan a voe ar c'henta tra a zizoloas an dud. Plos ha Plox, mibien Acon, eus ar c'hoec'hivet generation, o veza o pourmen var bord ur forest vras, e teuas un tempest gen horrubl, ma sede an eil guezen eus eben, hac e crogas an tann e meur a hini, dre nerz ar frotta-mant. Plos ha Plox, pere n'o devoa goelet biscoas tam tan, a zehjas e voa se ur huniton a beurs Done, hac e redjont en eur voela da lavarat d'o zad ar pez o devoa goelet: Acon a yeas ganto var ar plac, e pelec'h na gavjont nemet glaou maro, mes pere a voa tom. Dre un inspira-tion a Zoue, e lavaras d'e vugale qemer daou dam coad-se'h, hac o frotta stard an eil eus e guile: en ober a rejont, ha qerqent o devoe tan.

Er bloa 130 eus ar bed, Jubal a invantas ar fecon da ober tantennou evit en em roja. Tubald-Cain a invantas ar fecon da forgi hostillou-houarn. Naambleur, e c'hoar, a invantas ar fecon da neza ha da ober al lien.

Er bloa 139, Cain a gonstruas ar guenta kear, pehini a hanvas Enochia.

Dagon a invantas ar fecon da hada ar greun, ha da ober an alazr.

Er bloa 2178, an Athemianct a invantas ar voyen da

labourat ar gloan ha d'en em servicha eus a heaul. Mysor, o pourmen var bord ar môr, a zastumas un nebent ecumen, ha goude er beza tãnvêt, e laqas ober haulen.

Qenta marc'h a zougas houarnou, e voe hini Childeric, roue a Franç, er bloa 482.

Er bloa 515 e voe construit ar c'henta Mèlinou e Franç.

Er bloa 830, an Holandisien a invantas an horolachou.

Ar C'hlayer a voe implijet e Franç, vardro ar bloa 550, invantet tost da Rom, vardro ar bloa 400.

Er bloa 1400, Yan Guttemberg, soudard allamant, a invantas an Imprimeri.

Pell goude, ur manac'h a invantas ar Poultr.

Er bloa 1654, Charles IX, roue a Franç, a ordrenas ma commançe ar bloa ar c'henta deves a vis Gueuveur : aroc e commançe vardro Pasq.

*G. Comzit din eus a Franç.*

R. Ar Franç a so diviset hiryo en 86 Departamant, 363 Arrondissamant, 2842 Canton, ha 390,381 Commun. En hirdet e deveus 300 lèo, hac en ledandet 280. Beza e deus trêgont milion pemp cant mil a bopulation, 64 regimant infantiri a lignen, 20 regimant infantiri scanv, 4 regimant souisset, 2 regimant Carabinierrien, 10 regimant Culasserrien, 12 regimant Dragonet, 18 regimant Chasserrien, 6 regimant Huzardet, 8 regimant Canonnerrien var droad, 4 regimant Canonnerrien var varc'h, 3 gorf royal eur ar Geni; 12 bataillon Pontonnierrien, 8 escadron Train artilleri; beza e zeus ouспен,

55 Lestr a lignen , 30 Fregaden , calz a Gorvettennou ,  
ha 100 Batimant vian. — Qementse so hepgen en peoc'h,  
mes en brezel ec'h effet cresqi calz.

*G. Lavarit din ivez un dra eus ar Francisien.*

*R.* Ar Francisien so laouen ha hentabl. Carout a reont  
calz an oll sqienchou hac ar brezel ; beza e zint speredus,  
guiziec , ingenius , soudardet calonec ha gracios.

*G. Despeignit din Paris un nebeut.*

*R.* Paris e deus 10 lèo drô , ha tost da ziuo lèo a hir-  
det , var unan a ledandet. Beza e deus ouспен sciz  
cant mil habitant. Er guær-ze e zeus 1106 Ru , 120 Ru-  
dall , 41 Pourmenaden , 75 Placen , 12 Pors-rivier , 29  
Qæ , 14 Pont , 42 Cohi ha Placen-marc'hat , 33 Feunteun ;  
ouspen 30,000 Dy ; anfin , Capital Franç eo , hac unan  
eus ar gaera a zo er bed.

*G. Hanvit din ar Rouantelezou principal eus ar  
Europ.*

*R.* Bro-Saus , ar Russi Europ , ar Sued , an Autrich ,  
ar Pruss , ar Franç , Naples , ar Spagn , ar Portugal , hac  
an Turki Europ.

*G. Petra eo bividiguez ar Russianet ?*

*R.* E general e zint grossier , ignorant ha sauvach e-  
meur a brovinc , hac en darn all e tisquezont beza civil ,  
vaillant , speredus hac ingenius.

*G. Petra a leverat-u eus a habitantet ar Portugal ?*

*R.* Beza e zint deread , generus , sobr ha dissimul.  
Tremen a reont ivez evit beza glorius ha venjançus.

*G. N'hae ar Spagnolet, petra int-hi?*

*R. Pretanti a rear e zint rocq hac orgoullus; mes beza e zint sobr, pridius ha paciant ebars er maleurion; Lavarat a rear en proverb; Rocq evel ur Spagnol.*

*G. Petra a livirit-u eus a habitantet ar Sued?*

*R. Beza e zint glorius ha vaillant, ha carout a reont ar sqiantchou hac al lux.*

*G. Petra a lavarit-u ivez eus an Alamantet?*

*R. Tremen a reont evit beza laborius ha vaillant; mes n'int get sobr: evel calz a Vretonet, e caront o banne.*

*G. Petra eo bividiguez an Turquet?*

*R. Meurbet e caront ar repos, ha calz douguet e zint d'al lubricite, d'al lux, d'an impocrisi, ha dreist oll d'an interest. Carantezus int en andret an estranjourien. At Impalaer a guemer an titrou pompus eus a Doue en douar, Squeud an Eol hac al Loar, ha Distribuer Rouantelezou.*

*G. Comzit din-ivez eus an Holandisien.*

*R. O bizidi a so fontet var ar vertuz. Remercout a rear en o zoues un urz hac ur c'hundu leun a furnez, hac a so necesser d'ar gout o deus evit ar c'hommeç: n'eus pobl ebet qer propr evelto, var qeññent a apparchant dezo. Meurbet e caront ar bièr hac ar butun.*

*G. Pez seurt tud eo an Italianet?*

*R. E generat e zint grachus, prudant ha speredus mad evit ar sqiantchou haè ar micherion; mes reproch a rear dezo da veza venjunctis.*

**G.** *Nac ar Sauzon, petra ial-ii?*

**R.** Ar Gouarnamant en deves troet anezo a grenn d'an navigation ha d'ar c'hommerç; simpl ha serius int, mes mancout a reont a sobrentez.

**G.** *Pez seurt bividiguez o deus an Affricanet?*

**R.** Tremen a reont evit beza feroç, digalon ha disleal, herves ur beacher benac; hac herves darn all, en em gav meur a hobl er c'hontreou-se, o deus memes bividiguez evel a voa e commançamant ar<sup>h</sup>bed. En dezert Sahara, ur marc'hadour a roas cant mil scoet evit ur banne dour, rac eno e rear bete tri c'hant-leo avichou, hep na vez cavet ur strill.

**G.** *Roit din un detall eus a seiz Burzud ar bed.*

**R.** 1. Ar Volz caer a eufe Arthemis da ober d'e fried, ar roue Mosol, er guær a Halicarnas, capital ronantelez Cari. Ar pezh caer-se en devoa tri droatad ha tri ugent eus ar c'hreis-dez d'an nord; ar façaden a voa un nebeut strissoc'h; beza en devoa pevar c'hant nanec troatad a dro. E huedet a voa eus a seiz troatad ha trêgont, ha beza en devoa c'hoec'h kolonen ha trêgont en diabar. Ar philosoph Anaxagoras, eus a Glamozen, pa er goelas, a lavaras; Cetu aze calz a arc'hant chenchet e meur.

2. Templ Jerusalem, construit gant ar roue Salomon, var menez Moria, er plaç ma velas David an æl destrujer eus a justic Doue, ur c'hleze noas en e zorn. Seiz vloas e voet ouz en ober. Ar plaç santel eus an templ-se a voa hir ha ledan eus a ugent ilinad, ha demeus ar memes

huedet, eus a behini dec ilinad a voa goloet eus a aour, hac an dec ilinad all eus a vein precius. Joseph, an historian, a lavar e voa ennàn dec mil cantolor aour, dec mil daul, goloet en aour, hac unan goell vras, tout en aour; ugent mil anaf aour, ha daou c'hant mil arc'hant; pèvar ugent mil plat aour, ha cant tri ugent mil arc'hant; ugent mil scudel aour, ha daou ugent mil arc'hant; ugent mil ezançouer bras arc'hant, hac antercant mil all biannoc'h; dec mil robe goernisset eus a vein precius; daou c'hant mil drompill arc'hant, ha daou ugent mil instrument musiq, en aour hac en arc'hant.

3. Templ ar fals-douees Diana en Ephès. Distrujet e voe gant Erostrat, pehini, evit laqat eomz eus anezàn, a laqas an tan ennàn, 356 vloas aroc J.-C. Pèvar c'hant vloas e voet ous e construi. Beza en devoa pèvar c'hant pemp troatad varnuguent a hirdet, ha daou c'hant ugent a ledandet, soutenet gant seiz varnuguent colonen a dri ugent troatad huedet, ornet eus a sculpteür, pere a voa bet roet pepini gant ur roue. Ar c'hoad materi a voa cedrès, hac an dorjoù coad cyprès.

4. Ar Vuraillo eus a guær Babylon, construet dre urz Nabuchodonosor; beza o devoa seiz troatad ha pèvar ugent a ledandet, tri c'hant antercant a huedet, hac ugent léo dro. C'hoec'h caros bras a elle tremen varnezi en eaz. Ar guær-se e devoa pemp dor varnuguent, tout e cœor massif, pe evit tra, pa bromettas Doue da Cyrus conqueuri Babylon, e lavaras dezàn : *Me a fraillo an*

*lorojou coëqr.* ( Isai. ch. 25, v. 22. )

5. Statu Jupiter Olympien , e Pisa. Phidias, sculter brudet bras, a reas anezàn. Pausanias en deus en des-peignet evellen : Guelet a rear, emezàn, an Doue azezet var un tron aour hac olifant, memes tra evel ar Statu. Beza en deus var e benn ur gurunen a seblant beza olives; en e zorn deo e toug Douees ar Victor, en olifant, pehini e deus evit coeffuren ur gurunen aour, hac en he dorn cleiz e talc'h ur sceptre great eus a bep seurt metall precius, hac un erer er beg. E goëffeür d'an Doue a so aour tout, ha var an ornamanchou oll e zeus poltrejou a bep seurt anevalet, ha fleurjou precius meurbet, ha labouret exqis.

6. Statu Apolon, en Arem, savet etal pors Rhodes, en enor d'an Eol. Qen huel e voa, ma tremene ar vati-manchou, gant ar goëliou displeguet, etre e ziouc'har. Beza en devoa cant pemp troatad a hueldet. Charès, a Linda, disqib Lysippa, sculter brudet bras, a reas ar Statu-se; daouzec vloas e voe ous en ober. C'hoec'h vloas hac anter cant goude se e voe discaret gant ur grenamant douar, pehini a occasionas un distruch horrubl er saveol, ispicial e rouantelez Cari, hac en enezen Rhodes, 225 aroc J.-C. Goude ur spaç a 896 bloas e voe cavet c'hoas seiz cant ugent mil liour boes eus anezàn, pere a voe goerzet da ur judean, gant Moavia, c'hoec'hvet calif, er bloa 672 eus a J.-C.

7. Colonennou carre an Egypt, savet gant ar phara-

onet, Rouane ar vrô, ul lêo yad eus Cairn, ar gapital. Beza e zeus teir vras, hac a so vardro soo pas an eil ous eben. An hini so e costez an nord e deus c'hoec'h cant pas a hueldet, ha seiz cant pas a ledandet, en carre. Beza e voet tri bloas varnuguent ous o sevel, ha tri c'hant tri ugent mil den a labourer varnezo. Plin a lavar e voe dispignet seiz million en òiguon hac en rabes hepquen : an Egyptianet ancien a voa goall debrierien Jegumach ! An diou golonen all ne diat na qen huel, na qen teo hac an hini guenta. Ar guelennadurez ancien a ro da gredi e voent grêt evit servich da volzou-bez da familhou ar Rouane, ha penos en hini vrassa e vije deposet corfou ar rouane, goude o maro, hac ebars ar re-all corfou ar rouaneset ha re o bugale. Ar golonennou-se a so bepret en e za ; ha marteze meur a zoudard côs a so c'hoas var ar meaz, hac a elfe comz eus anezo gant guirionez, rac er bloa 1797, un arme derrubl a Francisien vaillant a voa neuze er vrô-se.

*G. Goude beza despeignet ar burzudou bras, comzê dîn bremd eus ar burzudou bian.*

*R.* Eh bien, selaouit : 1. Er c'hoec'vet cantvet, Pêr Alumnus, manac'h italian, a scrifas ar *Gredo* hac an Aviel diveza, var un tam paper, bras evel un diner.

2. Un den all, qer paciant, a bresantas da Elisabeth, rouanes Brô-Sauz, un tam paper, deus vent un ivin, var behini e voa scrifet sclêr Gouro'hemenou Doue, ar *Gredo* hac ar *Bater*, hac an dat eus ar bloas.



3. Jerom Faba, béleg italian, a reas ur pezh labour, en heuz, pehini a represente oll Mysteryou Passion J.-C., hac a zestume en ur graquen guelvez.

4. Grêt en devoa ive ur C'harros deus vent ur greunen vinis, ebars pehini e velet un autrou hac un itron; ur c'hocher o cundui ar c'harros, ha qezeg pere en treine. Ar marvaillou-se a voe presentet da Frances I<sup>a</sup>, roue a Franc, ha da Charles-Quint, impalaer ha roue Spagn.

5. Un den ingenius all en devoa soustruet ur gariolen olifant, pehini a guzet gant diou-esqel ur guellyenen.

6. Un autrou, en Paris, en devoa grêt ur c'harros, hac a voa treinet gant c'hoenn.

7. Paul Colomies a lavar beza guelet un ofreber e Moulins, pehini en devoa chadennet ur c'hoanen beo-buec ous ur chaden aour eus a anter cant maill, hac a boeze nebeutoc'h calz eguet ur c'hoanen vinis.

*G. Lavarit din peruc en deus an Aour ar breferanc var ar metailloù all,*

*R. Dre ma surpass anezo oll en sqüet, en pocz, ha dre ar vertuz en deus da veza forjabl meurbed. Guelet a rear ar breuven demeus a guementse en alapuradur. Ur physician en deus compodet ec'h eller, gant unan pe daou onç aour, golo un neuden arc'hant eus a seiz lèo ha pevar ugent a hirdet. Un all a lavar e ranoqfet trê-gont mil feillen aour, an eil var eben, evit ober uf lignen a deolar.*

*G. Petra so caus e gaver avichou scrituriou a ha*

*calz a draou all en diabars ar c'hoad?*

*R.* Dre ma zêo bet grêt an traou-se, pe blacet re-all en ur drec'hi ar c'hoad, ha dre ma cresqe, e teuent da veza goloet, hep beza effacet nac andommajet. Evelse, n'en deo qet estonus e vez cavet esqern, scrituriou, ha meur a dra all en diabars ur vezen benac.

*G. Pez seurt teoder o deus ar Goez?*

*R.* Beza e zeus a veur a vent; mes güelet a rear ivez eus a un deoder surprenus. Var menez Etna, pehini a zislounc tan, e voa ur vezen guistin, creus, hac a voa qen teo, ma elle ur messaer en em loja enni gant e oll déved; 150 troatad tro a voa enni. Linne a gomz ivez eus ur vezen ru-voad, eus a enezen Tenerif, pehini e devoa 34 trotad teoder. Tostic da Strasbourg, e zeus un andret hanvet *Ar Vezen Glas*, e pelec'h so realamant ur vezen dreist-ordinal: gallout a rear placi pévar ugent den en he abri, e qever tauliou bian; en diabars eus ar vezen e zeus cabinejou brao. En Ameriq e zeus ur vezen, hanvet *Guezen an Diaoul*, a behini ar frouez a ra un effet estranch: pa zizec'hont ous an eol, en em fraillont, o tiguéri, hac en em strincont a bell gant un drous qer bras evel a rafe amâ un nombr bras a fusuillou pere a deuse casi assambles.

*G. Ha pell-amzer e vev ar Goez?*

*R.* Prouvet aoualc'h eo e c'hell an Dêro beva cant vloas en douar mad, hac an Olives tri c'hant. Ar Cedrés eus a venez Liban a vev qet amzer, qen a sonje an dud

ancien na varve james. Ar Baoba, er Senegal, pehini a deu da gaout bete pèvar c'hant pemp, troatad ha trégont a deoder, a ell beva c'hoec'h cant vloas, d'an nebeuta.

*G. Petra eo bividiguez pobl Benein, en Afriq?*

*R.* Roue Benein n'en em em disquez nemet ur vech er bloas; ha neuze, evit renta enor dezàn, e lazer penizec pe c'hoezec esclav. Pa varv, darn eus ar princet a vez entèret gantàn, evit delc'hel compagnunez dezàn. Entèri a rear ivez gantàn an darnvuia eus e habijou hac eus e yeubl. Ar goaset ne gredont qet douguen un habit nemet recevet o deve anezàn digant ar roue, nac ar merc'het ur robe, qen a vez roet dezo gant o fried, pa zemezont. Epad seiz devez goude entèramant ar roue, e vez gouelioù caer, ha na rear nemet dançal en drô d'ar bez.

*G. Comzit din bremâ eus a bobliou ar Bresil, en Ameriq.*

*R.* P'o devez grêt ur prisonnier, mar deo lard, e vez débret ractal; mes mar deo trend, e roer dezàn ur plac'h d'e zervicha, evit beza e vestrez hac e larda. Pa vez êruet an devez d'en laza ha d'en débri, an oll a so pedet eus ar fest. En em divertissa a rear, en eur eva ha dançal; ar prisonnier memes a so deus an ebat; hac e lec'h beza trist, e cont, gant un ear joaüs, ar pezh en deus grêt a vaillantison, hac e lavar dezo pere eus o zud, pe o zad, pe o mam o deus bet rostet ha débret. Disfia ra anezo memes, en ur lavarad d'an hinf a dle en assommi, rêi dezàn e liberte, hac en débri én hac e dud. Respont a rear neuze

dezan : Mâ , ni a tialbenno ; rac bremâ souden e vézi débret te da-unan. Goude pera e vez lazet, goelc'het , rostet , ha neuze débret , ous en em exorti an eil eguile da veza courajus er brezel , evit gallout ober pourvisi-onou mad a guic tud evit o fest.

*G. Petra sinifi ar sclasserezou en em gueb e canton Bern, er Souiss ?*

*R.* Meneziou scorn int , pere na deuzont james , hac a so deus un dounder incomprenabl ; p'en em faoutont , e reont un drous qen horrubl , ma vez lavaret e za tout ar menez da frailla ha da zailla en ear a dammou. Ar beacherrien pere a so oblijet da dremen ar meneziou-se , a vez avichou lounqet er faoutou , el lec'h ma chomont da vervel. An dour a zorti eus ar seurt meneziou-se , a so ar guella hac ar yac'hussa da eva.

*G. Penos e rear an eurejou e kear Goa, en Asi ?*

*R.* Pa zemez unan benac , an ozac'h yaouanq hac e e vreg en em laqa var ur guile calet , ha neuze o c'herent ha tud an eured a vasata anezo c'hoecqa ma ellont. Ar vasadou-se a so lod eus ar blijadur hac eus ar cher-vad a rear dezo evit o eured.

*G. Petra eo bividiguez habitantet Guinee, bro vras eus an Afriq ?*

*R.* Ar vaurianed a chom er vro-se , na yevont qet ordinalamant ouспен anter-cant vloas. Beza e zeus prénved hac en em stag ous o diou c'har , hac o c'hign betes an ascorn. Goell lubric int , hac a boan e vez cavet ur plac'h

honest er vrô. Oll e zint feneantet, mezvyerien, traïtour hac hep sourei. Goernissa reont o diouc'har a voalinier aour, olifant, couraill, etc. An dénved er vrô-se o deus blêo elec'h gloan, hac an dud o deus gloan elec'h blêo.

*G. Petra livirit-u eus pobl'enezen santes Janned?*

*R.* Aoun bras o deus ous an diaoul, pehini a hanvont  
*Gregor.* Pa ra curun, ne gred den sortial eus e dy, gant aoun da veza paqet gant *Gregor.* Ar graguez so esclay, hac a ranq ober an ôll labouriou rust; ha n'o deus qet al liberte da zêbri gant o goaset. Ar merc'het a vez demezet d'an oad a seiz pe eiz vloas.

*G. Petra remerqer e fêçon beva habitantet Loango, rouantelez eus an Afriq?*

*R.* Ar graguez eo a had hac a droc'h an hed; servich a reont o goaset ous taul, ha goude e zeont da zêbri ar restajou d'ar gueguin. Pa fell d'ar roue eva, e son ur c'hloc'h, ha pepini a ranq soubla e benn betec an douar; p'en devez evet, e soner ar c'hloc'h un eil goech, hac e saver er za; rac den ne gred sellet outàn oc'h eva, dindan boan a varo.

*G. Petra eo bividiguez habitantet enezen al Laeron?*

*R.* Aroc ma êruas ar Spagnolet eno, an habitantet a sonje ne voa nemeto er hed. Biscoas tam tan n'o devoa güelet, ha pa er güeljont evit ar veach qenta, unan benac diouto a dostas re dost d'an tan, hac a voe dêvet, ha na gredent qen mui neuze sellet outàn nemet a bell. Ar merc'het a sell evel ur gaerentez çaut dâ o dent. O

demezi na had nemet qeit ha ma qeront. Ar graguez ordinalamant a so mestrezet absolu var o goaset. O langach a so douç hac agreabl meurbet; un estim vras o deveus evitàn; en em sellet a reont evel ar muia speredus hac ar goella lezennet eus ar bed.

*G. Peseurt Goardou en deus Impalaer Matarans, en enezen Java?*

*R.* E bales a so dioñallet gant dec mil maouez, hac o deus officerien evel en hon rejimantchou.

*G. Pez seurt ceremoniou a vez grêt pa vez curunet impalaer Cina?*

*R.* Pa vez curunet, e qemer un habit labourer hac un alazr alaouret, hac ec'h hara un nebeut demeus ur parq so en templ. Ur c'hustum aneñen eo etablisset etouez ar Cinais, evit digas sonch d'an impalaer penos e oll vadou na deu nemet eus a c'hoezen hac a boan ar bobl, hac e tle evit se e venaji.

*G. Petra veler a gurius e Salisbury, en Bro-Saus?*

*R.* Tour an ilis cathedral, pehini eo an huella eus ar rouantelez. An ilis-se e deveus qen alies a zôr evel a vis a so er bloa; qen alies a brennest evel a so a zeyes, ha qen alies a billier evel a so a heur.

*G. Petra livirit-ueus a brovinc Samogitier e Pologn?*

*R.* Lavarat a rêr ne all qet ur plac'h bale en nôs, nemet ur c'houlouen alumet e devez en he dorn, ha daou gloc'hic staguet a bep costez dezi. Na zemezer qet ordinalamant eno ar vugale német da drégont vloas.

*G. Petra ra an Albanistet pa varv unan anezo?*

*R.* Mont a reont, an eil goude eguile, da c'houlenn digant an hini maro, perac en deus abandonet anezo, hac e reont dezàn mil question evelse.

*G. Petra a gavit-u a ral en Amadabad en Asi?*

*R.* Goelet a rër eno hospitaillou evit al lapousset, hac evit al loened all en em gueb clàn, pere a vez panset ha soignet gant ar bayanet.

*G. Pez seurt poan a rër souffr. d'al Laeron, en kær Achem, en Indes?*

*R.* James n'o laquer d'ar maro; mes evit ar c'henta laeronci e vez troc'het an dorn betec an azorn; evit an eil e vez troc'het eben, hac avichou un troad, pe daou memes.

*G. Expliqit din petra eo menez Pic-Adam en Indes?*

*R.* Beza e deus diou léo a hueldet. Aroc êruout e bar ar menez, e caver ur blenen gaer, e creiz pehini e zeus ul loaguen goall doun eus ar goella dour a ouffet da eva, demeus a behini e sorti meur a voas dour, a ziruille traon ar menez, hac a form an teir rivier brassa deus an enezen. Guelet a rër e qichen al loaguen un daul men, var behini e zeo gravet merq troad Adam, pehini, eme an habitantet, a zo bet crouet hac entêret var ar menez. Sonjal a reont ivez penos ul loaguen dour sall, pehini a so tostic eno, a so bet formet eus an daelou a scuillas Eva var Abel. Evit êruout var leyn ar menez, e ranqer crimpat dre chadennou houarn, pere so staguet expres

evit se, rac anes e vez impossibl pignat eno. Var al leyn e zcus ur blenen rond, hac e deus daou o'hant pas.

*G. Peseurt bividiguez o deus ar C'hanibalet?*

*R.* Bale a reont en noas, ha ne vailluront james o bugale, ar pez a ra ma zint nerzus ha formet mat; o laqat a rër en ur baner coton; ha d'an oad a bêvar mis e ya-leont var o farlochau, hac en em habituont qement da se, qen a redont buannoc'h eguet den, pa vent rentet en un oad avancetoc'h. Peb tad a famill en deus e gabanea, e pehini e command. Ar graguez, an devez goude m'o deus ganet o bugale, a labour evel an ordinal; mes lavarat a rër en em laqa an ozac'h er goele; e pehini e rër dezàn chom epad meur a zevez, hac epad pere e rër dezàn ivez observi ur yun gouell rigorius. Ar hotret a so atao destinet d'ar brezel; débri a reont o enemiet, casi evel ar bresilianet Adori a reont an Doueou mad ha droug; hac e credont ivez en ur vuez hep fin eus an ene. Pa varv unan benac, e reont dançou trist, en ur grial en ur fêçon spontus. Mar en deus an hini maro ur morian, e lazer anezàn evit mont d'e servicha er bed all: entèri a rër ivez gantàn e veublou hac e guy.

*G. Lavarit din un dra benac eus a Keysèrlautern.*

*R.* Er bloa 1749 e voe trapet en ur stanq e qichen ar guær-se; ur pesq pehini en devoa tost da nontec troatad a hirdet; hac ar pez a voa a guriussa, e zoa ur pez coëor a voa staguet dindan e vrencqou, var pehini e voa gravet en langach grecian ar c'honizou-mâ: *Me eo ar Pesq*



*laquet en stanq-mâ dre daouarn propr Frederic II, impalaer, ar 5 a vis Here 1230; ar pez a zisq en devoa neuze ar pesq-se pemp cant nontec vloas.*

*G. Petra a veler a gaer e Strasbourg?*

*R. Tour an Itron Varia. Tost da zaou c'haut vloas e voet ous e batissa. Beza e zeo an huella colonen begueg eus an Europ. Pemp cant pèvarzec troatad ha tri-uguent a hueldet e deus. En delziou a rejouissang e vez alumet goulon parfout endro dezàn. Choezec cloc'h a voa ennàn; an hini brassa a boeze trivac'h mil livr. — An Horolach a so ebars an ilis a so ur pez ar c'haera : merqa ra tro ha distro ar stered, an col, al loar, ar fallaennou, ar sèzonou, ar vijilou, ar goueliou, ar misiou, an deveziou, an heuriou ha minuteou. Ar pèvar oad eus an den, represantet dre figurioù convenabl, a basse hac a son ar c'hardeuriou var clêyer bian. Neuze e teu ar Maro, chasseet gant ur C'hrisr ressuscitet, pehini gouseoude a bernet dezàn sqêi an heur, evit digas sonch e ranqer mervel.*

*Goelet a rêr c'hoas-en ilis S. Thomas, ar Volz caer en deus laquet Louis XV da sevel d'ar Marichal bras a Sax. E traon ur golonen begueg e veler an haros armet, e benn curunet a laure, hac en e zorn e vas a gommandant. Disqen a ra gant ur pas hardis bras ar pazcennou a gundn d'ar volz; en ur sellet ous ar Maro gant un ear indifferant. A deo e mâ ar bobliou var pere en deus gounezet ar victor, dindan figurennou convenet. A gleiz, ar Garantez en daelou, a fix anezàn, hac a ranvers e*

flamboesen. Var ar pazennou e veler figur ar Franc, gant un ear gracijs meurbet, ha leun a vadelez, pehini deus un dorn en em efforc da zerc'hel ar Marichal, ha deus eben e pouls ar Maro a so a gleiz d'ar volz, an doulsizl en he dorn, pehini a hast an haros da antren er volz a zalc'h digor. Er c'hostez all deus ar volz e mâ figur Hercul, a behini ar glac'har mâl ha bras a contrast gant hini ar Franc.

*G. Nac e Lyon, petra a veler a gurius?*

*R.* Horolach ilis an arc'hescopti. Grêt eo eguis un tour carre, peur-echuet dre un dom, aziouc'h pehini e zeus ur c'hoq hac a anonc an heur en ur digueri e ziouesqel, hac o cana teir goech. Var ar pondale bian a gurun an dom, e zeus ur souiss, pehini, qerqent-ha ma commanç ar c'harillon da son, a deu da sqêi an heur gant ur morzol. Var pêvar gadran e deus an horolach-se, e zeo merqet casi qement a so var hini Strasbourg.

*G. Petra a veler a ral e kear Turin?*

*R.* Guëlet a rêr ur Punc hac a so construet en ur fêçon dreist-ordinal, dre ma ranferm ur pazennou hac e deus un diribin douç, dre behini ar mulet a ell disqen ha pignat, hep en em rancontri.

*G. Petra a leverot-u din eus a guear Toulous?*

*R.* Vardro ar bêvarzevet cantvet e voe formet ur seurt Academia eno, ar gossa ens an Europ, e pehini an academicianet a bedas ar boetrianet, hanvet er vrô-se *Troubadour*, da asista en o assamble, an deiz qenta eus

a vis Mae. Prometi a rejont ur Violeten aour d'an hini  
 a raje ar goella rimou; ha *Clemañç Isaura* a deuas,  
 vardro creiz ar c'hoecvet cantvet, evel ar fondatores  
 nevez eus an etablissamant caer-se, en eur rei lod eus  
 he madou evit fondi pevar bris nevez, ar pezh a reas  
 pemp fleuren, eus a bere ur pas-voulous hac ur rozen-  
 gouez aour, ur violeten, ur sourcy hac ur fourdilisen  
 arc'hant, eus a dalvoudeguez c'hoec'h cant scoët. An  
 Autrou Florian en deus grêt ur voerz caer var se.

*G. Pegueit e vev ordinalamant an anevalet?*

R. Ar Guenan a vev . . . . .	1 blez.
An Alc'hoeder, . . . . .	15 ha 81.
An Azen, . . . . .	26 ha 18.
Ar Zilien, . . . . .	15.
An Eugen, . . . . .	19.
An Danvadez, . . . . .	12.
Ar Gasporn, . . . . .	100 ha 150.
Ar C'has, . . . . .	18.
Ac C'hoq, . . . . .	20.
Ar Marc'h, . . . . .	25 ha 40.
Ar C'hy, . . . . .	22 ha 28.
Ar Vran, . . . . .	100.
An Toussec, ouspen. . . . .	100.
Ar Guiber, . . . . .	7.
Al Lapin, . . . . .	8 ha 9.
Ar Gad, . . . . .	7 ha 8.
Ar Bleiz, . . . . .	20.

Ar Yar a vev. . . . .	10 bloas.
Ar Filip, . . . . .	12 hã 15.
An Oa, . . . . .	5.
Ar Pincin, . . . . .	28.
Ar Penmoc'h, . . . . .	20.
Al Louarn, . . . . .	15.
Ar Gavr-vôr, . . . . .	20.
Ar C'holle, . . . . .	30.
Ar Vioc'h, . . . . .	20.

*G. Petra eo ur Grenamant douar ?*

R. Re hir e vez din dont da explica deoc'h ar pencaus eus ar burzud horrubl-se. Lavaret a rin hepquen penos en diabars an douar e zeus ear, matierion nombrus, hac a guemer tan, un dour dreist mitsur, pehini, dfe e vogueden nezus bras, ha dre ma zeo ranfermet ger stard e fonç an douar, a deu oll da ober effortjou incomprenabl evit caout un digor. Rac-se eta, e zeo an ear, an tan hac an dour a so çaus d'ar grenamant douar. Ur spont eo clêvet comz eus ar maleuriou en deus occasionet. Er bloa 1755, Lisbon, kear gaptal ar Portugal, a voe oll dêvet, hac an darn-vuia eus an tier a vo lounçet e calon an douar, hac un nombr bras a dud ivez. En Ameriq e zeus güelet crenamant douar epad ur bloas. Anfin, ar maleur-se a êrur re alies.

*G. Petra eo ur Menez a dol tan ?*

R. Ur menez hanvet isfound tan, e fonç pehini e zeus ur môr a dan, ha pehini, pa deu da zislounça ar peza

so ennan, a ra gent commaç un drous an horrupla dindan an douar, qer crén hac ar gurun ar spontussa, ha c'houtelladennou eüzus Güelet a so ar seurt isfontou-se o tislounqa môriou plom, houarn ha coëor, bervetjoll, ha ruz evel an tan, eus a ziou lëo hirdet, pere a ruille vardro, hac a zê d'en em goll ebars er môr. Avichou e laqa parissa enezennou elec'h ne voa nemet môr, hac e tistol goaziou dour bervet, pesqet, mein; anfin, qement tra oll a ell caout. Er bloa 1640 e zeus goelet bete diou lëp ha daou-ugueut tro a zonar, goloet oll a ludu distolet dens un hevelep isfound. Avichou memes e titec'h ar mër a vez tost, hac e tisloung neuze dour sail, hac a ravaeb an donatou diwar dro.

*G. Pehini eo Roue an Anevalet pëvar droadët?*

*R.* Al Leon, aneval caer, terrubl ha generus. O veza achappet unan eus e lochen, e Floranç, e laqas ar spont dre oll. Etoues an dud a dec'he, e zoa ur vreg a zougue he buguel etre he divrac'h, hac a lezas da goeza. Al Leon a saillas varnezàn evit e zavori; mes ar vam baour a zistro ractal, ha leun eus ar garantez ardant e deus evit he buguel, en em string ous troid al loen furius: » Rent » dän va buguel, emezi d'al leon, en ur grial; rent dän va buguel, pe devor ac'hanòn ivez... » — Al Leon a sell ferm outi; hac evel ma en devije santet ar glac'har vras eus ar vam disesperet-se, ha comprenet an nerz eus he daelou, e seblantas beza tenerrët e garacter larouch, hac e pozas goustadie ar buguel var an douar, hep ober

nep seurt poan abet dezàn.

*G. Pehini eo Roue ar Pesget?*

*R.* Ar Balen, dre ma zeo ar brassa tout. Beza e zeus hac o deus bete daou c'hant troatad a hirdet, hac a fournis betec cant hariqen heaul.

*G. Pehini eo Roue al Lapousset?*

*R.* An Erèr eo, dre e nerz, e gourach hac e bromp-tidiguez. Lavarat a rear en deus trivac'h troatad a ledandet, pa vez digor e ziouesqel. Beza a zo hac a anlev d'envet ha bugale, da gassen'o neiz evit devori. Un paysant a lazas unan a doliou perchen, pehini a falveze dezàn anlevi ur buguel a bemp bloas. — Pa zoat o choas ur Roue d'al Lapousset, e vœ decidet henvel an hini en devije nijet an huella tout. Al Laouenanic paour en em laqueas ive var ar renq, ha pa velas na elle qet heuill ar re-all (sellit ar finese!), cetu en ous en em bosì sioulio var guein an Erèr; pehini, o veza nijet calz huelloc'h eguet an oll lapousset all, a zistroas da zellet outo gant mepris, hac e yas pelloc'h. Anfin, scuis bras, en em lavare a outàn e-unan: na ellàn mui; ret eo din diqen. Al Laouenanic o clêvet se, a guemer e nich, hac a lavar d'an Erèr: Penos, corrlach, n'ont qet evit va heuill! me a ya da vont calz huelloc'h; mes en em bosì a eure adare var an Erèr, pehini n'er sante qet, hac e teujont d'an douar; mes al Laouenan o qemer c'hoas e nich, na êruas en assamble nemet an diveza, hac a lavaras a boes penn: Me-meus gonezet ar victor, ha n'e don tam scuis.

Ractal e voe hanvet *Roue bian*, en gallec Roitelet, ha dre corruption neuze e voe hanvet *Laouenan*. Alies eo gouelloc'h an ingin eguet an nerz.

*G. Ha gouir eo e verzer ar Groaguez?*

*R.* Ia, goechal, en Bro-Sauz, p'en devije un ozac'h hoant da guittat e vreg, e vijent cunduet o daou d'ar marc'hat, ur gorden en dro d'o gouzouc; eno neuze un hucher a laqe ar vreg en goerz, han hini a laqe ar muia en devije anezi. Epad qementse, an ozac'h a vije ornet e benn eus a guerniel.

*G. Pet Roue a so bet en Franc?*

*R.* Dee ha tri-ugent, en ur gonta CHARLES X, pehini a ren brenn.

*G. Petra a lavarit-u deus ar Vaccin?*

*R.* Ar Vaccin a so un doneson ar gaera digant Doue; rac goechal e vije rentet dall calz a vugale gant ar vrec'h, hac e varve un nombr immanç gant ar vocen-se; mes ar Vaccin a oppos ur seurt horreurion, ha, dre c'hrac Doue, na velomp mui a vugale o tont da veza ar victim eus ur c'hlenvet qen terrubl. — Evit ar bloa, ur vreg a guær Marseill, e devoa pemp buguel; conseillet e voe da laqat o vaccina; mes hi a refusas crenn. Ur mis goude ar vrec'h a grogas ennõ, hac e varvjont o femp. Pebes glac'har evit ar vam desolet-se! Ar valeuruses a gollas he speret, dre an nerz eus he c'hlac'har, ha souden e varvas. Esperomp e tistrujo ar Vaccin grizien ar vrec'h.

*G. Goude beza comzet din eus ar vroyou all, grit*

*din hanavezout ive hini va brô.*

*R.* Ar zourcen eus a hobl Breiz en em goll, evel hini an darn-vuia eus ar bobliou all, en devalijen an amzet gôs. Un autor ancien ( Parthenius ) a assur deomp penos, er bloa 3100 eus a greation ar bed, ar Gallaouet a voa gouarnet gant ur roue hanvet *Britannus*, pehini a voe bisitet gant Hercul, pa dremenas er vro evit mont d'ar Spagn da gombati Gerion; ha penos an haros bras-se, o veza roet e galon ha plijet d'ar brinees *Celtina*, homan e devoe ur mab dioutan, hanvet *Celtes*. Un Historian all ( Diodor ) a lavar e devoe daou vuguel: *Celtes* ha *Galathes*, demeus a here e zeo deut an hanoyou a *Breizis*, *Celtiqet*, ha *Gallaouet*.

Cheffou ar Religion ancien, en Breiz, a hanvet Druset. Ar ceremoniou devot a vije grêt e fone ur forest vras. Ur men a serviche da auter, hac ur vezen dero da dapiseri. An anteramanchou a vije grêt gant calz a vagnificanc. Devi a rêt corf an den maro, ha gantan ar pez en devoa a breciussa, e armou, e guezec, e esclavourien, avichou memes e guerent a falveze dezo beza devet gantan.

Er feçon-se e voa ar stat civil, religius ha moral a Vreiz, qent mae'homeres ar Romanet.

Qerqent Cesar a apparis e brê C'hall, hac ar religion, al liberte, hac an institutionou a so destrujet. Mes ur pennad goude, forcet da drê e armou a enep broyou all, ar Breizis a guemer o re, hac e zint trec'h d'o adversourien. Nomb bras a vlcaveziou e zint bet en brezel,



avichou trec'hourien, avichou ecclavourien.

Eus ar bloa 402 da 406 ar Breizis-Arvoric a sonjas anfin beza mestrou en o brô, hac e chassejont ar cheffou Romen. Ar Breizis a hanvas hac a hanavezas evit Roue *Conan Meriadec*, Princ a Albani, commandant trouplou Breiz, pehini a voa bet hanvet Duc an Arvoric dre urz Maximin an tyrant. Conan, den vaillant ha prudent, goude beza trec'h bet oll adversourien Breiz, a deuas da veza fondator Rouantelez Breiz, ha Roazon a vee ar guær Capital.

*G. Goude beza grêt demp anavezout hon zourcen, comzit din bremâ eus a un action gaer benac eus a Breizis.*

*R.* Re am bez da lavarât, rac a bep amzer Breizis a so bet potret vad. Cesar a vouie se erfat. Mes mont a rân da reciâ deoc'h un action, hac a servicho da squier evit oll fêjou va brois.

Er bêvarzecvet canvet, epad ur brezel hir e devoa lec'h en Breiz, Charles de Blois, ha Yan IV, comt a Vontfort, en em dispute var succession hor brô. Charles de Blois a voa sicouret gant trouplou roue Franc, ha Yan a Vontfort en devoa galvet d'e sicour un nombr infinit a zoudardet roue Bro-Sauz, a bere en devoa goloet Breiz.

Epad un nebeudic amzer a beoc'h, pa sonjet beza tranquil, ar Sauzon na rent nemet pilla ar vrô. Calz a baysantet a deuas d'en em glêm d'ar Marichal a Franc Beaumanoir, pehini a gommande ar Vretonet e Josselin.

Ar chevalier breizad o zelaouas gant ur guir despet, hac a brometas dezo justic prompt. Mont a eure ractal da Bloermel, hac e reprochas da Vembro, ar Gouarner Sauz, gant calz a zoucter, an dizurzou a goumette e zoudardet, hac e nebeut a respet evit e gomz. Ar Sauz a respontas gant un insolanc pehini a choqas ar Marichal; ha goude un disput bras etrezo, Beaumanoir a broposas da Vembro ur gombat a drégont Breton a enep trégont Sauz, ar pez a voe acceptet ractal.

Qerqent evel m'en devoe roet da anavezout da c'harnison Josselin an defi en devoa roet da Vembro, an noblanç oll eus a drouplou Beaumanoir a regetas caout an enor d'e zicour en un action qen glorius evit ar vembro; ne voe ambarrarset nemet var ar choas. Bembro, er c'hontrol, na ellas qet caout etouez e re an nombr a drégont. Anfin, gant calz a boan e testumas anezo a bep tu. Plaç ar gombat a voe choaset tost da ur vezen dêro hanvet *Dêroen an anter-hent*, rac er memes distanç e voa da Josselin ha da Bloërmel. Un nombr bras a dud en em gavas var al lec'h, evit güelet ar gombat.

Aroc commanç, Bembro, pehini en devoa qeuz, a lavaras da Veumanoir e zoa en em angaget re scanvic en ur seurt affer, hac e crede e voa goelloc'h gortos consantamant o rouane, qent sqei taul. Mes ar Vretonet, impatient d'en em vusuri ous ar falserien, a grias oll assambles penos ne voant qet deut da blaç ar gombat evit return hep gouzout *piou diouto pe diouz ar Sauzon*

*en devoa ar gaera mestres*; ha memes, en em denna bep combati, a vije en em laqat goapât hac en em dishenori dirac ar guenvrois. — Hoc'h obstination, eme Bembro, a za da laqat Breiz oll e caon, ba na ramplaço bigen an dud vaillant eus a bere e za da veza privet. — Falvezout a ra calz da ze, eme Beaumanoir, ar gourach o luguerni en e zaoulagad; rac na zit qet da sonjal em bez amâ ganén ar vaillanta eus a chevalerien Breiz: ne domp nemet ar re nebeuta. An autrone a Laval, a Rochefort, a Loheac ne maint qet gancomp; mes ar brezellerien am accompagnuneca, a so aouialc'h hepgen evit ho trec'hi.

Neuze e voe roet ar signal, hac ar gombaterien renget var diou renq, e faç an eil d'eguile, a saillas gant fulor var o adversonrien: Dabord, an avantach a seblante beza evit ar Sauzon. Ar Vretonet a gollas Geoffroi de Mellon ha Geoffroi Poulart, o daou ecquierien, pere a voe lazet a dolliou lanc; ar chevalerien Yoen Charruel, Caro de Bodegat, hac an ecquier Tristan de Pestivien a voe discaret a dolliou merzol, ha grêt prisonnerien dre Bembro. Goude calz a effortchou, en pere e tisputet ar victor gant ur boan vras, hac o veza scuis meurbet hac accablet gant an domder, en em separjot a bep costez evit qemer halan hac en em refresqi ur moment.

Beaumanoir, o velet e zoudardet diminuet dre ar c'holl a bemp eus e re, a erbedas ar re-all da redoubli a effortchou. Neuze an ccquier Geoffroi de la Roche, o veza

lavaret dezàn penos ma vije armet chevalier, e santje redoubli e neiz hac e gourach, ar Marichal a autreas dezàn ractal an urz eus ar chevalliri, oüs en exorti da ober c'rfat da heuill exempl e dad cös Budes de la Roche, pehini a voa en em brudet bras e brezeliou an Douar Sante.

Ar momentic-se a beoc'h a voe heuillet eus a ur stocaden horruploc'h eguet ar guenta. Beaumanoir en est disqueuzas vaillant dreist musul; mes blesset e voe, hac ar c'holl euse voad, o veza en alteret terrubl, e c'houlennas da eva; neuze eo e reas Geoffroi du Bois dezàn, unan en e vignonet, ar respont brudet-mâ : *Beaumanoir, ev da voad, ha da sec'het a dremeno.* Ar seurt reproch-se a biqas enor ar Marichal, pehini a guntunnas da gombati gant calz a gourach; gonscoude, aocablet dindan an nombr, e voa var ar poent da veza grêt prisonnier gant Bembroc, pehini a grie varnezàn d'en em renta, e moment ma voe lazet ar chef Sauz-se gant Alan K'anraic, ecquier Breizad, pehini a roas dezàn un tol lanc, hac er discaras maro d'e dreid, al lanc o veza antreet-en e lagad hac en e empen. E' varo a laqas an disurz etoues ar Sauzon; hac ouspen, a ziangajas eus o c'homz an tri Breton, Charuel, Bodegat, ha Pestivien, pere a voa prisonnier; hac o veza bet delivret, e qemerjont lod er gombati. An ecquier Gouillou de Montauban a echuas, dre ur finesse brezel, da laqat ar Sauzon en diroud: sailla a eute var e varc'h, hac o veza grêt ar vãn da guemer an tec'h, evit o zennit var e lerc'h, e reas troyou ha distroyou eud.

hac e teuas d'ar c'haloup d'en em mesqa en o zoïes, en eur ranversi anezo hac a deo hac a gleiz a-doliou morzol. Ar Sauzon a gollas courach neuze; hac ar re na voe get lazet er gombat, a voe grêt prisonnerien, ha cunduet da gastel Josselin gant ar Vretonet triumphlus.

Cetu aze ar recit fidel eus ar gombat memorabl-se, pehini na vezo bigen ancounac'hêt etones ar Vretonet, na gant ar Sauzon memes.

Ar gombat-mâ en devoe lec'h er bloa 1350, d'ar sadorn aroc sul al *Letare*.

*G. Contant bras oun eus ho recit; mes carout a rafen clêvet henvel ar Vretonet vaillant-se?*

R! Cetu-int amâ: — CHEVALIERIEN,

Robert de BEAUMANOIR. \*

An Autrou de TINTENIAC. \*

Gui de ROCHEFORT.

Yoen CHARRUEL.

Robin RAGUENEL.

Huon de SAINT-YVON.

Caro de BODEGAT.

Olier ARREL.

Geoffroy du BOIS. \*

Yan ROUSSELET.

ECUIERIEN :

Guilleu de MONTAUBAN.

Alan de TINTENIAC. \*

Tristan de PESTIVIEN.

Alan de KANRAIS.  
 Olier de KANRAIS.  
 Louis GOYON. \*  
 Geoffroy de la ROCHE. \*  
 Guyon de PONTBLANC.  
 Geoffroy de BEAUCORPS.  
 Mauric du PARC. \*  
 Yan de SERENT. \*  
 N. FONTENAY.  
 Huguet TRAPUS.  
 Geoffroy POULARD.  
 Mauric ne TRONGUIDY. \*  
 Gestin de TRONGUIDY. \*  
 Guillou de la LANDE. \*  
 Olier de MONTEVILLE.  
 Simon RICHARD.  
 Guillou de la MARCHE.  
 Geoffroy de MELLON.

Ar steredennou a verq ar re o devoa c'hoas o nizien  
 bian beo, aroc ar revolution.

Ur Groas a voe savet goude er plaç-se ; mes distrujet  
 eo bet casi oll er revolution. Lenn a rêr c'hoas gouscoude  
 e lizerennou ancien , var ar sichen a supporte anezi :  
*Dã vemor perpetuel ar GOMBAT A DRÉGONT, go-*  
*nezet gant an Autrou ar Marichal de Beaumanoir,*  
*er plaç-mâ, er bloa 1350. — Louis XVIII en deveus*  
 laqet sevel un azrouëz ar c'haera er plaç-se memes, evit

renta henor d'ar Vretonet vaillant pere a voezas exposi  
o buez evit sauvetât o brô eus a valiç o adversourien,  
ha da zigaç sonch d'an oll Vretonet da zont d'o imita,  
mar bez ezom.

*G. Piou en devoe da zisput evit beza Duc a Vreiz?*

*R.* Yan a Vontfort, hanavezet evit Duc a Vreiz, dre  
gombat Alre, an 29 vis Guengolo 1365, a c'honzas var  
Charles de Blois. Gonit a reas Breiz oll, hac er meritout  
a rê, dre e furnes goude e victor. Ober a eure-en e vrô  
evel a eure goeçal Herri IV en Franç. Ar pez a gresq  
c'hoas e c'hloar, e zeo m'en devoa, da gombati an daou  
huissanta general eus an Europ: Duguesçlin ha Clisson.  
Emân, dre e grueldet, a voe hanvet *ar C'higuer*.

Famill Montfort, assuret var an tron dre e verit, en  
deus possedet an Dugach a Vreiz bete ma zeo bet unanet  
d'ar Franç er bloa 1524.

*G. Petra voe caus m'en em rous Breiz d'ar Franç?*

*R.* Ar brezelioù cuntunuel, hac ar garantez vras e  
devoa an Duques ANNA evit he fobl, pere a gare eguis ur  
vam dener. Ar Brincesse, leun a gourach, a vertus hac  
a garantez evit Breizis, o velet na elle get resista ous ar  
Franç, hep brêvi e fobl, en em resolvas d'en em sacrifica  
evit ar Vretonet, o tont da zemezi da Charles VIII, roue  
a Franç. Mes evit se tout, ne voe get c'hoas unanet Breiz  
d'ar Franç nemet goude maro Charles; neuze ANNA a  
zemezas da Louis XII, roue a Franç, dindan pehini e  
voe neuze unanet evit mad.

*G. Chom a rejot fidel d'ar Franc?*

*R.* Er bloa 1589, calz a guerion eus a Vreiz-en em discléryas evit an alianç a voa a enep Herri IV, roue a Franc; mes ar Princ mad-mâ, tad e oll sujede, ha mignon bras d'an dud divar ar meaz, da bere e promise *ar gar er pód*, a deuas a henn, dre vadelez e galon, da c'honit hini ar Vretonet, pere na rejont nep effort evit en attachi dezàn, hac abaoue ec'h eller lavaret evit gouir e zeo bet bepret ar Vretonet fidel d'o Roue.

*G. Piou en deus hanavezet da guenta Herri IV evit Roue a Franc?*

*R.* Parlamant Breiz : Henor dezàn !

*G. Petra a voe goelet a gurius e Petersbourg, capital ar Russi, er bloa 1740?*

*R.* Er gouàn vras a voe er bloa-se, e voe construct eno, gant ar brassa urz, *ur Pales Scorn*, pehini en devoa daou hac anter cant troatad anter a hirdet, var c'hoezec anter a ledandet, hac ugent a huedet. Eus ar rivier vras an Neva e voe tennet tout ar scorn-se, pehini en devoa tri drotad a deoder. Dre ma tennet anezo deus ar rivier, e vijent tallet evel ar vein benerez; ha pa vijent placet, ec'h arouset anezo gant dour eus a bep seurt liou. Dirac ar Pales-se e voe placet c'hoec'h canon scorn, teurniet, gant o affujou hac o rojou, grêt ive en scorn. Carguet e voent a boultr, hac e tenjot ganto.

*G. Comzit din ivez eus a Feunteun Vozeley.*

*R.* Ar Feunteun-se en em formas ouспен cant vloas



40, dre an tourmant horrupl. Un ozac'h, spontet gant  
 an tempest, a zortias eus e dy, hac a reas un toull en  
 douar; qerqent e saillas deus eno ul lomeu vras a zour,  
 gant qement a nerz, ma voe discaret d'an douar; hac o  
 veza bet goude tostet gant ur c'houlapouen, an dour en  
 em alumas, hac ar feunteun a leusgas flamoù, tan bras.  
 Abaone e deus conservet ar memes vertuz, bete so qen  
 ma laga en glaou ar brassa tamou eoad glas; ha gous-  
 coude an dour-se ne deveus tam tomder ebet, hac a so  
 memes qer yen eguet an doureyer all.

*G. Roit din, me ho ped, anaoudeguez eus a ur  
 Breton vaillant benac?*

*R. Re am bez da ober, ma ranqen henvel ar Vretonet  
 o deus disqezet e peb anizer ur gourach dreist ordinal.  
 Pévar hepqen a hanvin.*

1. La Tour d'Auvergn, a Garahes, den eus a ur sqiant  
 vras, hac en deus scrfet var sujet hon brô. Demeus ur  
 famill puissant e voa, pa zeo güir e tisqenne eus Turen;  
 Marichal a Franç, unan eus ar brassa generalet a voe.  
 La Tour d'Auvergn eta, en em angajas en brezel ar re-  
 volution ( lavaret so bet memes e plaç un den yaonanq  
 a voa seul souten e vam ); ha goude calz a fejou dreist-  
 ordinal, e falvezas d'ar gouarnanant en henvel General;  
 mes an den vaillant na falvezas dezàn caout nep grad,  
 nemet hini *Qenta Grenadier a Franç*, pehini a gons-  
 servas bete ma voe lazet gant un tol lanç en e galon, er  
 bloa 1800. E numero er rejimant na voe qemeret gant

den ; ha pa vije galvet en appel , ar grenadourien , a ur voez , a responte : *Maro er C'hamp a henor!!!...*

2. Er bloa 1828 , Bisson a gommande ur vatimant , e pehini e talc'het forbanet prisonnerien ; souden e zeo attaqet gant tri lestr preyzerien , eus a 70 den acqipæch pepini. Bisson n'en devoa nemet 14 den ; mes en em resolví a ra da rezista. Pa velas e saille ar forbanet d'an abordach , ha na chomme gantàn nemet nao den hepquen , ec'h ordren d'e dud en em sauetât , dre ma voa en em decidet da zêvi e lestr ha da sailla gantàn en ear , qentoc'h eguet en em renta d'eur seurt tud. Mil boan en devoe d'o laqat da abandoni o c'habiten : oll e falveze dezo mervel gantàn. Anfin , tec'hel a rejont , ha na chommas er vatimant nemet Bisson hac e bilot Tremintin. Emàn , carguet a indignation a enep ar forbanet , hac a admiration evit e gabiten , a dou e varvo gantàn. Laqat a ra e zorn en e hini , hac an haros Bisson , gant e zorn all , a laqa an tan er boudrieren. Ractal e saill ar vatimant en ear , gant un drous an horrupla , hac e tisparis Bisson evit james..... Tremintin a voe stlapet var bord an aud , evel dre viracl , mes brêvet oll , hac estropiet meurbet ; vardro dre eno , e voa ive distaulet 70 forbant lazet.

Qerqent ha ma voezas ar ministr qement-mâ , e tiguemennas da Tremintin dont d'e gaout , pa vije yac'h aoualc'h evit se. En effet , Tremintin a yas pa voe pare ; hac evel m'en em bresantas , e voe diguemeret evel un haros. Ar Roue , bepret prest da recompansi ar vaillantis ,

en em hastas da henori an den courajus-mâ demeus a  
vercou e justic hac e vadelez.

C'hoar Bisson e devoe pemp cant scoët pansion di-  
gant ar Roue.

Bisson a voa deus an Oriant, ha Tremintin deus a  
Enez-Vaz.

*G. Comzet oc'h eus din eus a Voaset vaillant; mes,  
ha ne zeus qet bet ivez Merc'het a galon?*

*R. Evel evit ar goaset, em bez calz da henvel; mes  
na gomzlin nemet a deir, eus a vroyou differant.*

1. Janned d'Arc, hanvet Goerc'hes Orleans, deus a  
vilajen Domremy, merc'h da ur paysant.

Ar Franc a voa d'ar c'houlse en ur stat trist, dre ar  
victoriou a c'honzè ar Sauzon ebars en hon rouantelez  
memes. Janned, evel dre uni nspiration divin, en em sel  
evel galvet gant Doue da sauetât ar Franc ha da chasseal  
an enemiet, pere a voa var ar poent da guomer Orleans.  
Mont a reas eta qerqent da gaout Charles VII, roue a  
Franc, hac o veza expliqet dezàn scléramant an objet  
eus e demarch, en em laqas e penn an trouplou, hac ec'h  
ancourajas an oll zoudardet, dre he exempl, en eur chas-  
seal ar Sauzon. Cundui a reas neuze ar roue d'ar guær a  
Rheims, evel m'e devoa promettet aroc, evit laqat e  
sacri. Mes an haroses-mâ a voe qemèret e siech Compiègn,  
ha casset da Rouan, e pelec'h e voe condaonet, evel ur  
sorceres, da veza dêvet en beo, er bloa 1451, en mez  
he adversourien milliguet. Souffr a eure ur maro qer

cris ha gen horribl, gant ur gourach ar vras.

Louis XVIII en deus laqet sevel statu Janned d'Arc en Orleanç. — An Autrou P\*\*\*\*\*, Breton, a reas d'e regimant arrêti dirac ar Statu-se, hac e qemeras an dra-peau evit he saludi dre deir goech.

2. Ur guær o veza bet qemeret dre assaut, ar general adversour, aroc lezel commanç ar pillach, a bermiettas d'ar graguez antevi ar pez o devoa a brechiussa, ha sortial a guær. Souden e voë güelet greg commandant kaer o sortial, gant he goas var he diouscoas, hac ar graguez all ous e heuill er memes fêçon. Ar general adversour, carguet a admiration evit un action qen caer, a zifennas d'e arme coumetti nep dizurz.

3. Er bloa 1522, ar Sauzon o veza qemeret Montroulez dre drabison, a bille hac a laze an habitantet. Ur plac'h a gambr eus ar Ru-Vras, o veza güelet oll tud he zy te-c'het qüit, a zastumas merc'het all deüs ar memes ru en he zy; hac o veza digoret scoutill ar c'haö, pehini a voa doun bras ha-leun a zour, e lezas an nôr vras-antèr-digor, en hevelep fêçon; dre ma antree ar Sauzon a vanden, e coezen er c'haö an eil var eguile, en nombr a oupen pêvar-uguent, e pelec'h e voent beuzet. Anfin, an ty a voe forcet, hac ar plac'h generus-mâ, pehini a voa en em dennet er c'halatres gant he c'hamaradeset, a voe pour-suet gant ar Sauzon, ha stlapet dre ar p'ennestr var ar pave. Pebas dommach neo qet bet conservet e hano!

G. Peseurt Rouanez so bet gourchal e Montroulez

R. Mari Stuart, rouanez Scoç, brudet bras dre he c'haerdet, he speret hac he maleuriou. Diabarqi a eure e Montroulez, er bloa 1548, en eur vont da Baris evit demezi da vab ar roue a Franç. An Autrou Rohan, e penn an noblañç, a recevas anezi o sortial ens ar vaimant. Goude an *Te Deum* canet en ilis ar Vur, e yas da gouent S. Dominiq, e pelec'h e voa ar pales; mes e tremen dre Vanel ar Prison, etal ar C'hoc'hi, ar pont a grevas dindan poez ar gavailliri. Ar Scoçsis en em laçs neuze da grial trahison, trahison; mes an Autrou a Rohan, pehini a valec tost da litier ar Rouanez, a bronças a boez penn ar c'homzou-mâ : *Biscoas Bretonna eure trahison*. Epad an daou devez a dremenas ar Rouanez e Montroulez, e voe lamet dorjou kar deus o flaç. — Piou en devije erdet neuze e rancje un deiz ar Brincés gaer-se, goude beza bet zanfermet nontec vloas er prison, dont da goll he bues var ur chaffot! Ah! bepret e vezo clêmet Mari; mes ar jalouses ha tyrantes Elisabeth a vezo da james excret.

G. *Petra a velet a vraz goechal e Montroulez?*

R. Gouel ar *Papegol*. Epad mis Mae en em rassemble keris er *C'hastel*, pehini na voa qet ranfermet neuze evel bremâ, hac e velet eno ar Mèr hac oll pennaer, ar vourc'hisien, paour ha pinvidic, hac tout o famill, ar varc'hadourezet froües anfin, evel en ur pardon. Ar botret a vije recevet chevallierien d'an oad a seiz vloas, mes na dennent nemet da driyac'h. E beg Forossen

Pantegot e placet ur Rondachen, var behini e voa al lapoussic coat, hanvet *Papegot*.

Neuze ar Mêr, o veza grêt laqat pep tra en ur, a c'halve ar chevalerien, pere heppen o devoa droat da denna. Eno neuze, pepini en e renq, armet eus e fusuil, a zeporte an urzou. Qerqent ar Mêr a rê sin d'ar c'henta chevalier da denna; ha pepini, herves e renq, a glasqe tapout al lapous. P'an devoa ur chevalier ar boneur da ziscar ar Papegot, e save neuze eno ur c'hri a joa, hac e vije proclamet *Roue ar Papegot*. Ractal e tiredet en kær, en ur grial a bouez penn: hen-a-hen en deus dis-caret ar Papegot. Diouc'h-tu e vije loget ur variqen via e ty ar Roue. Ar Mêr, a gostez dezàn *Roue ar Papegot*; cheffou kær, hac ur bobl immanç, en em rente en lli ar Vur, e pelec'h e vije canet un oferen solanel, hac e vije roet neuze mil livr en arc'hant da Roue ar Papegot, pehini ivez d'e dro, a roe ur repas caer.

*G. Peseurt marvailhou a gontet goechale Montroulez*

*R. Comza rê eusa Deuz ar Pouliet, eus a Gariguel ar Ancou, eus ar Ganneres-Nôs, eus a Bot e voutou coad, eus ar Buguel-Nôs, eus ar Gornandonet, pere a voa dindan ar C'hastel, o conta o aour hac o arc'hant, ha demeus a d'aoüigou brao evelse, pere a rê aoun d'ar vugale, hac avichou ivez d'ar re vras. Beza e voa c'hoas, ur brince e feunteun *Campr-al-Livet*, hac un all e feunteun *Sant-Nicolas*, pere a deue en o frennestrou d'an tol greiz-de. Adrec forn St.-Martin e zeus ivez ur feunteun*

e pchini e chénche au dour e guïn deiz goüel S. Martin, d'an tol a anter-nôs, etc. — Qementse n'en deo qet estonus, rac lavarat a rêr penos, bremâ diveza e zeus bet tud speredus aouïalc'h evit daoulina dirac ur *Golen!*

*G. Ha beza e zeus un dra gurius benac da velet en Breiz?*

*R.* Evel an oll vroyou all, Breiz e deus ivez meur a dra gurius da velet. Aroc 1806 e velet Tour caer ar Vur e Montroulez; güelet a rear Tour S. Vaze, unan eus ar c'haera burzud à Vreiz; ar Pors-môr hac ar rivierou; grêt oll e mein beñeres, ar pezh na veler qet er guæriou brassa memes. — Pebes dommach ne zeus qet a blom-mennou evit furnissa dour da guêris! Istre ma ve se un ornamant, evez ivez eus ar brassa utilite.

E Castel-Paul e veler Tour caer Creiz-kær, ur pezh an hardissa; en ilis cathedral emedi Bolz superb an autrou Visdelou.

Tost da Bont-Aven ez eus ur roc'hel vras hac a ell un den hepquen da laqat da vouja.

*G. Comzit din ivez deus Brest.*

*R.* Beza e zeo, hep douetanç, ar c'haera pors-môr eus a Franç, hac ec'h eller, hep ober brouderez, assuri ar c'henta eus ar bed oll, dre an antre estonapl eus ar Kad, herves rapport an autrou C.... à V. Mes na ellàn qet nombri amâ an traou burzudus à veler er guær-se nae en Breiz: re am bez calz da scrifa.

Goechal, peb den nevez demezet, a voa obliget da

zaillad er môr an deiz genta ar bloas. Nac a intanvezet,  
ma n'o devije qet gouezet d' goazet qez nefin !

*G. Petra a veler a derrubl vandro enez Sizun ?*

*R.* Bêg ar Raz ; ne zeus netra muioc'h spontus eguet  
ar passach horrubl-se ; evelse , ar vartolodet guez , ous  
en tremen , a lavar :

Va Doue , va zicourit da basseal ar Ras ,  
Rac va lestr a so bian , hac ar môr a so bras.

An nep na zent qet ouc'h ar stur ,  
Ouc'h ar garrec a ra sur.

Biscoas den na dremenas ar Ras ,  
N'en devije aoun pe glaz.

*G. Petra a leverot eus ar guær gôc a Is ?*

*R.* Ar guær gaer-se a lavaret a voa er memes plaç e  
pelec'h e mâ bremâ Douarnenez , herves Pieres Baud ,  
hac an historianet all ancien eus a Vreiz , hac a zupposer  
beza bet submerjet vandro fin ar bêvarvet canvet , da la-  
varet eo , bremâ e zeus ouspen pemzec cant vloas. Goelet  
a rêr c'hoas cos moqueriou , pa vez izel ar mor.

Lavarat a rêr :

Abaoue ma zeo beuzet ar guær a Is ,  
Ne zeus qet cavet par da Baris.

*G. Petra velet goechal a gurius e Qemper ?*

*R.* Bep bloas , deiz gouel Santez Cecilia , da ziv heur  
goude leiu , e pignet er gazidou a so aziouc'h an idô-  
dâl , e pelec'h e voastatu men ar roue Gralon var varc'h ,  
etre daou doue ilis S. Gonorintin. End e vije canet var



vuzic. Epad-se, ur Serjant poliç a bigne var taillard ar marc'h, ur voutaill, ur gobelet hac ur zerviet en e zorn; emàn a gargue ar veren a vouïn, a bresante anezi d'ar roue; mes én e-unan a eve ar gouïn, a dorche e vuzellou d'ar prinç, hac e taule ar veren var ar blacen. Ar bobl en foul a zaille evit e drapout; hac an hini à deue d'e renta, hep na vije na faoutet na torret, en devije cant scoët evit e boan. Goude se e vije laçet ur branç laure en dorn ar roue Gralon.

*G. Petra léverot deus ar C'hroasic?*

*R.* Ar graguez hac ar merc'het yaouanç, güisquet caer, hac ornet eus a bep seurt fleurjou, a rede var ur garree a voa var bord ar môr, hac eno, o daoulagad savet varzu an ên, hac o divrac'h en ear, e canent, pa velent al lapousset-môr :

Lapous, Lapous, Lapous,

Digas din va fried; ha din va amoureux.

*G. Roet oc'h eus din da hanavezout meur a bobl : comzit din ivez bremâ eus ar Vretonet.*

*R.* Ar Vretonet a gar ar religion dreist pep tra, hac ar brassa attachamant o deus evit ar Rône; meurbet e zint hospitalyerien. Mes reproch a rêr da galz da garout re o banne, ha da nonpas beza propr aoualc'h. Ar peza eston, calz a dud, e zeo guëlet peguen dies e zoar azezet diouc'h taul, evel pa vez dies caout ur banç qempen evit beza en hucllet hac en distanc convenabl, ar peza bermetfc lezel ar scudel var an dzul, e lea'ne d'elc'bel

être an daouarn. Ar roulin a ra calz a c'haou, rac na e'hoantaer qet planta goez Avalou, rac aoun da veza laeret, hep sonjal penos, amezeg an hini a blantse goez avalou, o velet en defe emâ calz a avantach, a denfe ive d'e dro da blanta e-unan; hac an eil e ser eguile, o defe ar blijadur da gaout ur banne gist d'o repasiou, dreist oll da derri o sec'het epad al labouriou rust ens an eaust. An tillach a vez gallet ivez beza ramplacet gant pleinch. Un c'hustum fall eo ivez eva varlerc'h den, hep rîça ar picher pe ar scudel. An habitud da lezel a hep seurt loustoni vardro an ty; qementse oll, herves rapport ur medecin habil, a so penn-caus da galz a glénvejou danjerus. Neuze, elec'h guelvel ur medecin mad, na rear, peurvuia, nemet remejou commerezet, ha na glasqer ar medecin nemet re divezañ avichou.

Qement a lavarer amâ na dle choqi den, rac ne zeus bet nep intantion d'en ober : control a se eo.

Mes, caout a ra din e zeo poent deomp achui hor C'honferançou, rac aon, elec'h dont da amusi, e teufet da scuziza, ar pezh na souhetan qet. Va design eo hepquen laqat tremen ur momentic a blijadur en ur len-al levric-mâ. Contant, ma el plijout. Evelse bezet grêt.

F I N.

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vêr.